

# KANTIK SANT ALBIN

1. Sant Albin, eus lein an Neñvoù Selaouit ouzh hor pedennoù  
Beilhit warnomp gant karantez Hon diwallit pad hor buhez

## **Meulomp a greiz kalon**

### **Sant Albin, hor patron**

2. E bolz an Neñv, holl hep stagell Dreist ar bed-mañ, savet uhel  
Pa lugern ar stered en noz Kaer eo mantell ar baradoz
3. A dud kristen ha pinvidik C'hwi 'zo ganet e Langidig  
Grit ma vo luskellet e Breizh Kalz danvez sent, skedus e Feiz
4. Ur mistr gouiziek, santel ha fur Ho kentelias, kreñv krouadur  
Grit ma vo holl hor bugale Kelennet 'veldoc'h hep dale
5. Evit kaout digemer vat E Rouantelez Doue hon Tad  
Sant Albin, pedit evidomp Gant karantez, ho soludomp
6. Hag e liorz ar Baradoz E-lec'h na gouezh morse en noz  
Gant levez ha gant dudi Ni gendalc'h c'hoazh d'ho meuliñ